

Matilin an Dall

Breiziz, va c'henvroiz karet,
Hirio, siouas, me a zo koz ;
Nag a bet gwech em eus sonet
Da zansal en deiz hag an noz,
Ha mar plij gant santez Anna
E klevoc'h c'hoaz war an dachen,
Son skiltrus va bombard velen
O lakat tud hor Breiz da drida.

DISKAN

Me eo Matilin an Dall,
Ar bombarder laouen,
A lak an dud da zansal
Diwar va barriken :
Eun taol sut ! ha souden
Pôtrez skanv d'an abaden
Eur bom soun, ha raktal,
Paotred o fringal ! gè.

Yaouank e kollis ar gweled....
An eostik, ma lavarer mad,
A gan flouroc'h en e gaouet
Pa vez dallet e zaoulagad :
An dall a gaerik Kemperle,
En e lochen war ribl an dour,
Evel an eostik a zon flour
Etre an Izol hag an Elle.

Yannik-ar-Japel, em c'hichen,
A c'hoari gant e viniou,
Dreist-holl pa zun bord e weren,
Evit souplat e vuzellou,
Nag hen a sko, Yann, va c'homper,
Gant e zounerezik lirin....
Ha d'e heul pa sko Matilin,
Eo mars gwelet penaos e fringer.

Bet oun e Paris, eun devez,
O sini dirak ar Roue
Hag hen kouls ha tud e balez,
Gant ar blijadur a c'hoarze,
A c'hoarze krenv, a c'hoarze pell,
Hep gallout miret da c'hoarzin,
O klevout an dall Matilin
O tistaga toniou Breiz-Izel.

Malo-Korred a Gear-Ahez,
Kenta grenadour a Vro-C'hall,
A veritas klevet ivez
Sounerez Matilin an Dall;
A dost, a bell e tiredet,
Da welet patroum ar soudard,
Ha da glevet mouez va bombard
O kana enor ar Vretoned.

Kals all a vije pinvidik,
Ha ganin-me ne jom netra,
Nemet isign va bombardik,
Da c'hounid va zammik bara,
Met a ze pikol fors ne ran;
Me zono keit ha ma vevin,
Ha deiz va maro ne gollin
Nemet va bombard ha va diskan.
J. QUERE.

Son ar C'hafe

DISKAN
Netra ne blij d'in-me
Vel eur banne kafe !

Diouz Kastel-Pôl da Lanhuon,
Diouz Kerne da Oelo,
E zo bet savet meur a zon
Warbenn an evajo ;
Evidoun, keit ha ma vevin,
Me gav d'in
E lârin : (Diskan)

Ar vamm, pa glev he bugel kaez
O ouela 'n e gavel,
Gant eun dakennig kafe laez
A ra d'ezan tevel ;
Ha neuze diou vouezig vihan
A-unan,
A vouskan :

Pa 'c'h eas Fanch, ar paotr faro,
Da welet Gaudig vrao,
E lâras d'ez : « Du-man 'zo
Jistr ha gwin leiz ar c'hao ! »
Met Gaud a respontas hepken,
D'ar paour den,
War he fien :

E tiegeziou pinvidik
Ez eo bet, a-viskoaz,
Ar c'hiz servija kafe rik,
Warlerc'h ar prejou bras ;
Aotrounez hag itronezed
A glevfet
O lâret :

Ar paour ive, mesk al ludu,
En eur pod pri faoutet,
A domm eur banne kafe du
Araok mont da gousket ;
Ha hep sonjal 'n e baourte,
'N e wele
E hunvre :

Kenta evez ar martolod,
Kerkent ha dihunet,
Eo redek da zifenn e lod,
Raok ma vo holl evet,
Eus an dour du a ra d'ezan
'N eur leinan,
Disklerian :

Ar c'hafe 'zo eul louzaouenn
Dispar dreist pep hini ;
N'haller ket en eur ganaouenn
Kaer awal'h hen meuli ;
Ma zôn a vefe kalz re hir
Penegwir,
En eur gir :

Me a varvo ivez, marvat,
Evel pep krouadur,
Ha mar 'pe c'hoant neuze, tud vat,
D'ober d'in plijadur,
War ma bez dister ho pedan
Da skrivan
Kement-man :

DISKAN DIWEZAN
Mann d'ezan (pe d'ez) ne blij
Vel eur banne kafe !

(Tennet eus levr soniou
Evnig Penn-ar-C'hoad
e gwerz e ti Suberbie, Gwengamp).

BRETONED

HAG A GAR SONIOU, GWERZIOU HO PRO, KEMERIT HOUMANANT
DA

" BREIZ "

KAZETENN SUNVEZIEK

15 LUR AR BLOAZ

Skrivit da : ADMINISTRATEUR « BREIZ »,
13, place du Centre, GUINGAMP. — C. C. 211.86

MOULADURIOU ARVOR. — GWENGAMP